

SKOAZELLER.EZ WAR AR C'HEHENTIÑ HA BRUDAÑ UR ROUEDAD



Ar Gevredigezh C'hoariva, Kevread rannvro ar strolladoù c'hoariva a-vicher hag amatour e brezhoneg a zo o klask ur skoazeller.ez kehentiñ ha brudañ.

Kefridioù :

- Brudañ obererezhioù ha stignadoù ar gevredigezh : Skol c'hoariva, Devezh ar skolajidi, Stignad Arvest, Skoazell evit ar c'hrouidigezhioù amatour,
- Brudañ nevezentioù ar gevredigezh hag hini izili ar rouedad o voueta al lizher kelaouiñ miziek,
- Krouiñ ha skignañ ur blaketenn niverel vloaziek ha divyezhek evit kinnig ha brudañ ar gevredigezh gant an ensavadurioù ha gant ar publik.

Barregezhioù goulennet :

- Gouzout brezhoneg, live C1 c'hoantaet (kement dre gomz ha dre skrid).
- Kaout ur spered skipailh, bezañ en e vleud/en he bleud evit daremprediñ an dud ha skrivañ, kaout ur spered-krouiñ, bezañ emren, prest da vont ha da zont.
- Mestroniañ meziantoù diazez ar pajennozañ hag ar rouedadoù sokial.
- Anavezout rouedad kevredigezhioù Breizh, rouedadoù ha darvoudoù hag a denn da sevenadur Breizh ha lec'hioù skignañ pezhioù-c'hoari.
- Bezañ dedennet gant ar c'hoariva ha brudañ ar yezhoù bihanniver.

Aozadur al labour :

- Kevrat termenet hanter-amzer. Emdroadur posubl.
- Burev ar gevredigezh a zo staliet e Douarnenez. Labourat a-bell 'vo gallet ober.
- Karr-tan dre ret.
- Gopret hervez Emglev a-stroll ar buheziñ, strollad C, feur 280.

Titouroù-all :

- Post-labour da bourveziñ a-benn : **02/09/2024**
- Degemeret e vo an teuliadoù emginnig betek an : **03/05/2024**
- Evit un eskemm rakdibab, raktresiñ bezañ dibres e-kerzh miz Even evit ur pennad kaoz.



Itron prezidantez C'hoariva
13 straed Mikêl an Nobletz
29100 Douarnenez

choarivabrezhonek@gmail.com

06 38 78 35 15

www.teatr-brezhonek.bzh